



---

## Divizoù prestañ dafar jubenniñ

---

etre            An aozadur prestañ  
                  Ofis ar Brezhoneg  
                  8, bis straed Felix Faure  
                  29270 Karaez-Plougêr  
                  Pgz : 02 98 99 30 10  
                  ofisk.bzh@wanadoo.fr

hag             An aozadur amprestañ

**Divizet ez eus bet gant Ofis ar Brezhoneg kinnig ur servij prestañ dafar jubenniñ digoust d'ar c'hevredigezhioù c'hoant ganto diorren implij ar brezhoneg en o ser.**

Diviz :

Prestet eo an dafar evit ur pad resis a .....a ranko bezañ doujet-strizh.

Klotañ a raio ar prest gant un implij resis-mañ.....  
a vo dalc'het d'an.....  
Difennet-groñs eo implijout an dafar evit implij all ebet estreget an hini disklêriet a-us hep aotre skrivet an aozadur prestañ.

D'an aozadur amprestañ emañ dont da gerc'hat an dafar e ti an Ofis.

Rankout a raio an aozadur amprestan resteurel an dafar amprestet diouzhtu goude dibenn an abadenn brestañ, d'ar c'hentañ an hevelep deiz war-eeun, d'an diwezhatañ an deiz war-lerc'h. Ma c'hoarvez d'an dafar prestet bezañ implijet e-pad an dibenn-sizhun e ranko an dafar bezañ restaolet d'al Lun war-lerc'h diouzhtu.

Goulennet e vo digant an aozadur amprestañ lezel ur chekenn gred a 4300 € gant an Ofis a-raok gallout sammañ an dafar jubenniñ.

E-keit ha n'eo ket bet adkemeret ent fizikel an dafar gant an teknikour e-karg en Ofis e chom an dafar dindan atebegzh-rik an aozadur amprestañ.

Teknikour an Ofis hag an aozadur amprestañ a ranko gwiriañ a-gevret eo bet restaolet pep pezh prestet.

Goude da mont en-dro an dafar restaolet bezañ gwiriet gant un teknikour eus an Ofis e vo restaolet he chekenn-gred d'an aozadur amprestañ. Miz zo gant an Ofis evit en ober.

D'ober an dafar prestet ez a :

Ur valizenn EZL 103020 L evit kargerioù HDE 1030

Daou garger 10 tokarn pep hini

10 tokarn klevet, HDE1030-1

Ur mikro dorn dineud SKM 1030

Ul lugell gargañ

Un doug mikro gant e neudenn

D'an aozadur amprestañ emañ kavout ar jubennour(ez) en deus ezhomm anezhañ/i ha gwelet gantañ/i war-eeun an divizoù marc'had ret. Nep gaou graet ouzh an dafar jubenniñ gant ar jubennour(ez) a vo sellet outañ evel ouzh ur gaou graet gant an aozadur amprestañ.

Diouzh ar goulenn, e c'hall an Ofis kuzuliañ an aozadur amprestañ war implij ar jubennourien.

Asantiñ a ran d'an divizoù prestañ-mañ :

En anv an aozadur amprestañ

Anv

Karg

Sinadur

Siell an aozadur amprestañ